

Jaffrennou (Taldir)

Teatr Brezoneg Pobluz

Karhêz. Moullerez ar Bobl. (1911)

Taldir, Jaffrennou, bet ganet e Karnoed e 1879, marvet e Bergerac e 1956.

Modernnaet eo bet an doare-skriva.

Tennet eo ar pezh-c'hoari-mañ euz al leor

Teatr Brezoneg Pobluz Karhêz. Moullerez ar Bobl. (1911)

Embannet e oa bet al leor-mañ e Karhêz gand moullerez ar Bobl (kelaouenn Taldir), ha war eun dro e Pariz, e ti Champion.

Al leor-mañ a zo kinniget

D'an Aotrou Emil ar C'hloareg

Mêr Plouian, Kannad Montroulez er Parlamant.

An *Teatr Brezoneg* a oa kouezet en e boull, pa adsavas an Aotrou Ar C'hloareg eur strollad en Plouian. Homañ a roas eun displegadenn gaer-murbed a Vuhez Sant Gwenole, ar Sul 14 a viz Eost 1898. War an heveleb tro e oe krouet *Kevredigez Broaduz Breiz*, ar genta vreuriez a spered breizad.

Notennou :

Aliez a-walh eo galleg ereadurez Tldir.

Mad e vefe lenn e-barz ar Barzaz Breiz (Kervarker) : Maro Pontkalleg.

Iskiz-kenañ eo pezh-c'hoari Taldir. Eun afer "taillou" e oa ha netra ken. Hag evid-se en-doa Pontkalleg hag e vignoned klasket en em gleved gand bro-Spagn, a oa brezel etrezi hag ar Frañs en amzer-ze. E gwirionez e oa gwelet fall Pontkalleg gand ar beizanted.

Mennoz Taldir a oa lakaad istor Pontkalleg war ar memez tu hag emgleo an nasionalisted a oa e Breiz en e amzer.

Pontkalleg

c'hoariet evid ar wech kenta en Karhêz, al lun 24 a viz Ebrel
1905.

(Loeiz ar Baniel, rener ar Strollad)

C'hoarierien

Pontkalleg, markiz Gwer.

Kouedig, e vignon braz, ha dijentil.

Prijant, e floh.

Talhoued, dijentil.

Montlouis, dijentil.

Lambilli, dijentil.

Rohan Poulldu, dijentil.

Herve Mellag, dijentil.

Ar Berraie, dijentil.

Lenora, peizantez yaouank.

Yann ar Gall, klasker-bara.

Eur Beleg.

Eur Jolier.

Eur Habiten.

Eur Barner.

Peizanted.

Dragoned.

Arvest I

An teatr a ziskouez eur frankizienn e-kreiz koajou Lanvao, en bro-Wened. Eun nebeud tudjentil a Vreiz a zo en vodet eno war digarez chaseal, da steui ravolt 'eneb gouarnamant ar Rejant, er bloavez 1719.

Kevrenn I

**Talhoued, Lambilli, Rohan, Kouedig, Ar Berraie,
Herve Mellag, Montlouis**

Talhoued

Setu ez om bodet war digarez chase
'Vid kaozeal gwelloc'h deuz frankiz ar hontre.
On Breiz-Izel, on Bro, a zo pleustret, siwaz,
Gand ar Rejant ! Bro-Hall 'zo bemdez oh argas
On tud, on peizanted, on douarou, on bro...
Ar sklavaj hag ar gwask a zo mestr tro-war-dro !
Gwechall e oam eüruz dindan eul lezenn vad,
Breiz a oa libr, paotred ! Libr e oa ! An eurvad
A oa en pep kastell hag en pep tiegez !
An taillou, dastumet gand poell ha gand furnez
Ne binvikaent eur rouantelez all.
Ne vijent ket lakaet d'ober servij Bro-Hall !...¹

Lambilli

N'eo ket gand komziou hir 'vo greet eun dra bennag.
Amzer-da-zond ar vro ouz on foan a zo stag !
Ahanta, mignoned, labourom neuze stard
'Vid entana dre-oll dijentil, kouër, soudard !

Talhoued

Dija 'beus 'n em vodet en Keraez eur wech,
En Poñdi eur wech all, ha den n'halla rebech
N'on-deus ket bet poaniet. Ar vro 'zo du ganeom².
Er vreuriezh on deus greet 'zo mil den evidom !

Lambilli

Mad ! Bremañ pa zo tud dre-oll prest d'enebi
Eo deom labourad c'hoaz dre zindan ! Prienti...
Prienti kezeg mad, armou ha listri mor
Ha lakaad eur gwisk dir war on douar Arvor,
'Vid pa zeuio ar houlz da zevel 'vid ar vro
E vo prest kement den ha kement tra tro-dro.

Rohan

Kaozeet hoh-eus mad, Lmabilli, ma mignon,
Ha Rohan ar Poulldu 'zo ganit a-galon.
Ha ganit ema c'hoaz ma douarou a-bez
A holo deg leo dro ha daou-ugent parrez !

¹ Ne vijent ket lakaet d'ober servij Bro-Hall !... : iskiz-kenañ ar pezh a lavar. Gwelet fall-tre e oa Pontkalleg gand ar beizanted e gwirionez.

² Ar vro 'zo du ganeom : bet skrivet evel-se. marteze "a-du"

Kevrenn II

An heveleb re : Pontkalleg, Prijant.

Rohan

A ! Setu Pontkalleg ! Peleh e oas chomet ?

Pontkalleg

War-lerh eru hadig wenn eun tamm am-eus redet.
(*Rei a ra e fuzuill da Brijant, e floh*).

Rohan

Eur hadig wenn, paotr kêz ! Deut out eta brema'
Da garoud ar chase !

Pontkalleg

(a hoarz)

Ar gedon gwenn, la la !

Mez na petra 'zo ta ?

Lambilli

E oam ouz da hortoz

Evid ober on zoñj a-raog ma vezo noz.
Lavar deom, Pontkalleg, pa'z out eur gwir Vreizad
Evid sevel ar vro petra a vije mad ?

Pontkalleg

Aze, ma mignon kêz, 'rez din eur gision³
Em-eus respontet dezi pell 'zo 'barz ma halon.
Me 'zo prest da gemer an armou dioustu-krenn
Hag evid Breiz-Izel on prest da rei ma fenn !...
Mez – me 'oar mad penaoz an dra-ze n'eo ket fur !
Pa vez kerreg a-z-eeun ez eo red troi ar stur !...
Krogom da labourad pep hini en e vro
Dastumom en on zi ha poultr ha fuzillo'.
Prezegom an emzao e-touez ar beizanted
Ha lakom en o fenn kas an intandanted
Degaset gand Pariz da waska war on bro !
Setu ma ali-me. Ha bremañ eo d'ho tro.

Talhoued

(*a lak e zorn en dorn Pontkalleg*).

Eur hrog dorn, Pontkalleg. – Ma ali ne cheñch tamm.
Red eo c'hweza an tan a-raog ma savo flamm.

Ar Berraie

Se 'zo gwir.

Rohan

A-dra zur !

Herve Mellag

Me 'laro eun dra all.

Petra 'hellom on-un a-eneb da Vro-Hall ?
N'on-deus ket a listri 'vid souten gand enor

³ eur gision : galleg. eur goulenn.

An disterra emgann a vo roet war vor.
Perag ne houlenfen ket sikour gand ar Zaozon !

Pontkalleg

(*gand buanegez*).

Petra 'larez aze ? Te n'out ket eur Breton ?

Lambilli

Goustadig, Pontkalleg ! Komzet mad 'n-eus Mellag.
Red eo d'ar blantennig kavoud eun harp bennag.
Ma ali, 'vad, n'eo ket da houlen ar Zaozon !
Biskoaz mignon d'ar Zaoz n'eo ket bet eur Breton
Mez – petra 'vir ouzom da houlen Spagnoled
'Vid sikour ahanom da stourm ouz Gallaoued ?

Rohan

Netra.

Lambilli

Da Rejant Frañs, Spagn 'zo enebourez,
Me anvez Cellamar – Me 'oar zo eur vreurie
Greet gantañ 'vid diskar ha laza ar Rejant.
Mond mad a ra an traou 'barz an amzer brezant.
A-raog nebeud amzer e vo brezel spontuz
Evel steriou dour sklêr e redo ar gwad ruz !
...Setu an digarez deom da zistaga Breiz
Deuz eur gouarnamant he hemer evid preiz !
Dishual ha distag !... O ! Pebez amzer gaer
E vezo evid on bro ! O ! Bloaveziou seder !

Pontkalleg

Lambilli ! Lambilli ! Trubarderez a rez
Mez – d'enebi ouzit 'mez ket hardiegez !...
Mar gall on Breiz-Izel beza dishualet
Forz piou her graio ! Na pa ve Spagnoled !

Kouedig

Ya.

Lambilli

Greet neuze an taol. Kasom eur halvadenn
Da Roue Spagn, 'vid kaoud digantañ pemp mil den
(*Tenna a ra eur paper deuz e hodell*).
Al lizer-mañ 'zo bet greet ganin a-bell 'zo,
N'eus 'med eun den da gaoud bremañ. Piou hen kaso ?

Prijant

Me, Aotrounez ! N'on ken 'med eur paour-kêz Breton
Mez me a gar ma bro !

Pontkalleg

Te 'zo gwaz a galon.

Lambilli

Kemer al lizer-mañ. Kachedet eo ganin.
Mond a ri da Wened.

Prijant

Da Wened mond a rin⁴.

Lambilli

Mad. Eno e kavi eul lestr livet en gwenn,
Hag an ano lenni warni eo *Steredenn*.

Prijant

Steredenn ! Gand ma vo c'hoaz eur "Steredenn" avad !

Lambilli

Esper 'm-eus evidout. An traou ah ay d'on grad.
Lavar da baotr al lestr ma ano. Netra ken.
Kas a ray ahanout bete Spagn.

Prijant

Mann ouspenn !

Lambilli

Eur ger c'hoaz. En Madrid e weli ar Roue,
Ha d'ar Roue hepken e roi al lizer-ze.
Diskouez ma gwalenn-viz hag e vi resevet.

(Rei a ra e vizaoued da V/Brijant).

Prijant

Ober 'rin.

Rohan

Ha chañs dit, Prijant, den a galon.
Ha bremañ, Pontkalleg, kan evidom eur zon !

Pontkalleg

*(a gan)*⁵
Sao, Breiz-Izel, d'an neh da vannielou
Ruziet gand gwad on hendadou !
Stagom d'on gouriz ar hlezeier hir
Ra vo on divreh kreñv evel dir,
Lavarom oll a-bouez on fenn :

(Oll a-unan)

Breiz da virviken ! Brezi da virviken !

Dihun, Breiz-Izel, ma mamm venniget
Rag an deiz a zo degouezet.
On galv a ziston war benn ar mene'
Hag a entana peb ene.
Breiziz deuz pep parrez a ziskenn.

(Oll)

Breiz da virviken ! Brezi da virviken !

⁴ Da Wened mond a rin : da Wened ez in. Brezoneg iskiz a vez aliez gand Taldir.

⁵ (a gan) : Kan Bale tud Breiz (notenn gand Taldir)

O youhadennou a red 'dreuz d'an êr
Bete gweled on lanneier.
Ar mammou a zegas o bugale
Da gaoud o zadou en arme.
N'eus 'med eur youh en Brezi penn-da-benn :

(Oll)

Breiz da virviken ! Brezi da virviken !

Beteg ar gouelehiou ar re bella
Ar horn a vrezel a vouda,
Hag a lar d'an oll boblou ouz ar bed
Ema beo gouenn ar Vretoned,
An aval mor 'yud en eru dremn !

(Oll)

Breiz da virviken ! Brezi da virviken !

Rohan

Deom bremañ d'ar chase, da chaseal gedon
Da hortoz chaseal Gallaoued pe Zaozon !

*(Ober a ra eur gwall zin, Talhoued, Lambilli, Ar Berraie,
Mellag, Montlouis ha Rohan a ya e-kuit).*

Kevrenn III

Pontkalleg, Kouedig, Prijant

Pontkalleg

Ma floh yaouank Prijant, eur Breton mad emaut⁶,
Gouenn tud ar Vretoned ema he hred ennout.

Prijant

Ma aotrou ha ma mestr, n'eus ket eun den en Breiz
Na vefe stad ennañ o skuill e wad e-leiz
'Vid kas er-mêz ar vro al lakizien laeron
Hag an noblañsiz faoz n'int ket a ouenn vreton.
An hini 'gav an tu d'ober eun dra bennag
'Vid sikour e vamm-vro, a zo sur eun den gwag
Mar n'her gra ket dioustu. – Mez a-walh eo bremañ,
Ma karit, aotrounez, 'cheñchfom ar sujed-mañ.

Kouedig

Pontkalleg, lavar deom 'ta neuze an doare
Pa'z-poa kollet da hent just e-kreiz ar chase !

Pontkalleg

Peoh !... Ger ebed war ze.

Kouedig

Koulskoude.

⁶ emaut : ez out.

Pontkalleg

C'hoant ho-peus ?

Kouedig

Ya, c'hoant em-beus, sur mad ! Eun dra bennag 'zo 'dreuz.

Pontkalleg

Ma ! paotr. Setu amañ 'r sujed euz ma dale.
E oan dre ar hoajou gand Prijant o vale,
Ma fuzuill war ma skoaz ha ma horn 'barz ma beg,
Pa welis, azezet en-mesk ar bodou c'hwek...

Kouedig

Eur had wenn !...

Pontkalleg

Eur had wenn. O ! Mab kêz, eur had wenn
N'am-beus gwelet he far em buhez penn-da-benn !
Eur plah yaouank, ken koant ha dous hag eun êl...
He bleo du 'oa flouret gand pokou an avel,
Ha gand he daouarn skañv e oa oh ober stamm.
Chom a ris eno krak.. He zal 'oa ken divlamm !
Hag e tostais c'hoaz, goustadig, goustadig,
Beteg ma oan erru just en he hichennig.

Kouedig

A ! A ! Hag ar had wenn a redas diganit !

Pontkalleg

Nann, mab kêz, ar hontrol 'zo gwir, a laran dit.
Chom a reas eno, hag he daoulagad sklêr
A bare warnon, gand eur mousc'hoarz seder !
Setu-me azezet raktal en he hichenn
'N eur durlutad anezi gand komzigou laouen.
Piket 'oa ma halon !! Ma halon 'zo dezi !
... Hag e santan e vin kollet, eun deiz, ganti !

Kouedig

Alo, gweled a ran out yaouank eun tammig,
Ha 'vid ar genta plah e tri da galonig !!

Pontkalleg

N'eus forz ! Eur beizantez ez eo, me hen anzaos,
Ha me 'zo markiz Gwer. Mez ken koant eo, ken brao
Ma c'hoantaan beva dre amañ da viken,
Chom ganti, komz ganti, he gweled, netra ken !

Kouedig

(garo)
Pontkalleg, ha da vro ?

Pontkalleg

(o chom da zoñjal)
Ya, ma bro ! O !, ma bro...
Ma bro da genta toud !

Kouedig

Ar galon a garo

Eur plah, n'hallo biken ober burzudou braz.

'Tre da vro hag eru verh, mignon, e-peus da choaz.

Pontkalleg

(a bleg e benn, hag a zao goude leun a nerz).

Ma mestrez a zo Breiz ! Rezon e-peus, ma breur,

Dilezom an traou-mañ. Ar merhed 'zoug gwalleur.

(Tevel a ra eur pennad).

Prijant

Teurvezit, aotrounez, ma kimiadin bremañ.

Poent eo din mond en beaj da gas al lizer-mañ.

Pontkalleg

Kerz, Prijant, ha chañs dit.

(Poka a reont)

Kouedig

Kenavo, ma den mad !

Prijant

(En eur bellaad).

Kenavo !

Kevrenn IV

Pontkalleg ha Kouedig

Pontkalleg

War ma feiz, sell aze eur Breizad !

Kouedig

Ya. Gand m'on-bo, prestig, pemp mil a Spagnoled ?

Pontkalleg

Ne blij ket din gweled kement-se o toned,

Breiziz a-walh a zo ! Mez, pa'z eo greet an taol...

... Deom bremañ d'ar chase. Warhoaz, e Rumengol

'Zo adarre redadeg ti Lambilli.Goude

'Tistroin d'am neiz-bran, e-kreiz parrez Berne,

'Vid dastum em haoiou armou ha soudarded !

Pa vo deut ar brezel, e vo prest Ar Faoued !

Kouedig

Sdelaou eur ganaouenn, a-barz mond, Pontkalleg.

Houmañ 'zo bet savet 'vid an dud yaouank.

(Kana a ra)⁷

Ni, Breiziz a galon, karom on gwir vro.

Brudet eo an Arvor dre ar bed tro-dro.

Dispont 'kreiz ar brezel, on zadou ken mad

A skuillas eviti o gwad !

⁷ Bro-goz ma zadou (notenn gand Taldir)

(O-daou d'an diskan)

O ! ma mamm-vro, me 'gar ma bro.
Tra ma vo mor 'vel mur 'n he zro,
Ra vezo digabestr ma bro !

Breiz, douar ar Zent, douar ar Varzed,
N'eus bro all a garan kement 'barz ar bed.
Peb menez, pep traonienn, d'am halon 'zo ker.
Enno 'kousk meur a Vreizad taer.

Ar Vretoned a zo tu kaled ha kreñv.
N'eus pobl ken kaloneg a-zindan an neñv ;
Gwerz trist, son dudiuz a ziw an eno.
O ! pegen kaer eh out, ma Bro !

Mar deo bet trehet Breiz er brezelioù braz
He yez a zo bepred ken beo ha biskoaz.
He halon virvidig a lamm c'hoaz 'n he hreiz,
Dihunet out bremañ, ma Breiz !

(Diskan. Mond a reont e-kuit).

Kevrenn V

Lenora

(Heh-unan o tond)

Ya, ya, ya ! Aze 'oa an hini 'm-eus gwelet
Ar mintin-mañ... koant eo.

(Gand gwall zellou)

E galon 'zo skornet !

Pa oan oh erruoud, 'm-eus klevet, tuchantig,
Anezañ oh anzañ 'oa Breiz e vestrezig.
Ha me neuze ? Bremaig, n'eus ket gwall-bell c'hoaz,
Du-ze, kreiz ar yeot hir hag ar bodennou glaz
En-doa touet rei din e gastell, e leve,
E zouarou, e draou, din... e vestrez neve' !
Me 'vije rouanez war eun niver a dud...

Kevrenn VI

Lenora, Eur Paour

(Ar paour a oa kuzet eno. Klevet e-neus Lenora).

Ar Paour

Ma merh, an enorioù 'vez aliez gwall but !

Lenora

Piou out-te ?

Ar Paour

Eur paour-kêz, a veaj en peb bro
'Vid klask e damm bara da hortoz ar maro.

Lenora

Peleh e oas bremaig ?

Ar Paour

Aze, 'dreg eur wezenn.

Kement tra bet laret dre guz e selaouen.

Lenora

Kement tra ? Kont 'ta din petra 'deus lavaret !

Ar Paour

Int a lavare oll e vije prest brezel,
Hag e ruillje ar gwad war douar Breiz-Izel.

Lenora

(Spontet).

Brezel ?

Ar Paour

'Tre Frañs ha ni. Ya, 'mesk an noblañsiz

'Oa aze n'eus ket pell, e oa sur gwir Vreiziz.

Ha me a zouhet deze ar yehed, ar viktor,

'Vid dishuala krenn treid on bro gêz Arvor.

Lenora

Te 'gomz 'vel eur person ! Mez piou 'oa an dud-se ?

Ar Paour

Unan eo Lambilli hag egile Talhoued,
Unan Rohan, unan Kouedig, oll tud parfet,
N'ouzon ket, a-hend-all... A ! geo, Pontkalleg,
An hini 'zeblante ar muia kaloneg.
Hennez a lavare : « Rezon ho-peus, ma breur,
Ma mestrez a zo Breiz. Ar merhed 'zoug gwalleur. »

Lenora

(Dezi heh-unan).

Hennez eo a garan !

(D'ar paour).

Fentuz eo, ma den mad,

Kendalh gand da istor. Te 'lar ez eo Breizad,

Mez peleh 'ma o chom ?

Ar Paour

Piou ?

Lenora

Piou, Pontkalleg 'ta !

Ar Paour

Perag az-peus-te c'hoant da houzoud an dra-ma' ?

Lenora

(a ro 4 real d'ar paour).

Dal, kemer.

Ar Paour

En Berne, 'barz kanton Ar Faoued

Ema o chom.

Lenora

Mad eo ! Kenavo, me 'zo eet !...

Kevrenn VII

Ar Paour

Kerz 'ta, plah fall, kerz 'ta ! Gweled a-walh a ran.
'Peus c'hoant deuz Pontkalleg, 'ma da zell warnezañ,⁸
E zo⁸ droug braz ennout en-deus da zilezet
Evid rei e vuhez da ouenn ar Vretoned !
Mez n'on ket maro c'hoaz ! Mar vez-te e êl fall
Me a vo e êl mad ! Me, paour-kêz *Yann ar Gall*.

*(Kana a ra)*⁹

Ne glaskan ket ar madou
Na gweloh planedenn !
Aliez an enoriou
N'int 'med eur vogedenn !
Pa vezo ma Bro vad
Distag a beb chadenn
Me, paour-kêz truilleg plad,
E varvin¹⁰ c'hoaz laouen !...

(Ar ridoch a ziskenn).

Arvest II

An teatr a ziskouezo eur park, tostig d'Ar Faoued.

Kevrenn I

Pontkalleg, Kouedig

(armou a zo ganto)

Pontkalleg

Tri deiz 'zo eom en hent ! Poent e oa repozi !
Tri deiz 'zo om war varh ! Mez me lar, heb fazi,
On-deus kaset an traou war-raog eur pennad 'zo !
- Emaom e miz Gouere – Daou viz 'zo, pe war-dro,
E oam en koad Lanvao en eur vodadeg vraz ;
Goude en Rumengol ; hag en Pondivi c'hoaz ;
Hag er Merzer, 'kichenn Landerne ; en peb leh
'Beus prientet ar vro, 'beus prientet an treh...

Kouedig

'M-eus 'med eur heuz.

⁸ E zo : ez eus.

⁹ (Kana a ra) : Gwerz Laou Druilleg (notenn gand Taldir).

¹⁰ E varvin : me...a varvo (fazi yezadur).

Pontkalleg
Penaoz ?

Kouedig
Eun taol mad 'beus market.

En Questembert¹¹.

Pontkalleg
Ya 'vad ! Lambilli ha Talhoued.
Ha me, on-boá galvet en kastell Questembert
Daou-hant a dujentiñ, oll kaloneg ha taer
'Vid kinnig an emgann d'eur vagad soudarded
(Rujumant ar Champagn, 'm-eus aon, e oa anvet),
Mez ar rujumant-se 'zo eet dre eun hent all
Hag an taol a steuem, siwaz ! 'zo deut da fall.
Mez forz a zo, ma breur ! Se 'ziskouez ez om kre'¹²
P'on-beus gallet boda, 'n eul leh euz ar hontre,
En eun taol krenn, kemend a Vretoned wirion.
'Vid m'eo market an dro, arabad koll kalon !

Kouedig
Ya, sur, arabad ve !
(*Selled a ra en-dro dezañ*).
Sell ! Petra 'zo a-hont ?

Pontkalleg
Soudarded !

Kouedig
Soudarded ! Eur vagad 'zo o tond...

Pontkalleg
Red eo stourm !
(*Tenna a ra e zabrenn*)

Kouedig
Te 'zo sod ! N'om nemed daou,
Ar re-ze a zo kant ! Fall e yafe an traou...
Deom kentoh d'az kastell, a zo tost d'Ar Faoued,
Ha degasom ganeom eun nebeud mignoned
Evid rei eur fread d'an enebourien-mañ.
Hast buan ; 'welez ket ez int erru amañ !

Pontkalleg
(*a lak e zabrenn en feur*).
Te 'lar, kamarad, deom buan da glask tud.

Kevrenn II

Eur Habiten, Dragoned, Yann ar Gall (*chadennet*)

Ar Habiten
Malloz ruz ! N'eo ket gwir, n'ho-peus ket klevet brud ?

¹¹ Questembert : bet skrivet evel-se er skrid orin. Kistreberh.

¹² kre' : kreñv.

Tud 'zo kuzet amañ !

Eun Dragon

Me ne welan netra.

Ar Habiten

Genaoueg ! Serr da veg ! Me eo a gomz ama' !

(An oll a chom sioul).

Mar n'eus den, gwell a zo¹³ ! War ma ene daonet

Gwall dud da stourm outo ez eo ar Vretoned.

Seul-vui 'kaver nebeud, seul-vui 'ra ze ma hont.

(En eur drei 'trezeg Yann).

Ha te, lapous, perag 'sellez ken divergont ?

Yann

Ho tigarez, aotrou !

Ar Habiten

Te a zo eur spier

Paet gand Pontkalleg ! Te a zo eur hoz laer !

Bremaig e vi krouget aze... gand eur gordenn,

Hag ar sparfelled gouez a grigno dit da benn !

Yann

Me n'on ket eur spier, kabiten, ma hredet¹⁴,

Me a glask ma bara dre ganton Ar Faoued.

Ar Habiten

(D'ar zoudarded)

Prientit eur gordenn !... Setu pesort maro

'Roan d'ar Vretoned.

(Yann a gouez dan daoulin).

Ar Habiten

E larez patero'

Koz peizant divergont ! Eur gordenn, ha buan !

(Eur zoudard a zeu gand eur gordenn hag he laka en-dro da

houzoug Yann. Neuze e klever trouz braz).

Ar Habiten

(spontet)

Daonet 'vo ma ene ! Pontkalleg, pariom,

A zo erru du-ze ? Alo, paotred, redom !

(Redeg a reont kuit, o lezel Yann eno).

Kevrenn III

Pontkalleg, Kouedig, Peizanted, Yann

Pontkalleg

Eet int kuit ! Ar wallchañs a zo ouzom-ni stag.

¹³ gwell a zo : gwell eo.

¹⁴ ma hredet : "am hredet" er skrid orin.

Mez eun deiz o fakim e-barz eur horn bennag.

(Gweled a ra Yann)

Sell ! Piou eo an den-mañ, eur gordenn deuz e benn !

Eur Breton, 'oant o vond da grouga krak-ha-krenn !

Laeron ha gwaskerien ! Dond da hegas on bro

Hag ouspenn, d'on broiz dond da rei ar maro !

Mignoned ! Deom buan war o lerh ! Poent eo c'hoaz

Ha deuz o zorfejou, tennom eur vañjañs vraz !...

(Mond a reont kuit).

Kevrenn IV

Yann ar Gall

(e-unan)

Yann ar Gall

Daonet 'vin ket ! Aze 'oan tost d'am grougadenn !

Me hen tou war ma feiz, ne vin ket tapet ken !

...Pebez den, Pontkalleg ! Hennez 'zo eun doue !

Mann 'med selled outañ e teue nerz din-me !

Hennez eo, evid gwir, mestr braz ar Vretoned,

Dindan e vannielou 'tlejem boud unanet.

(Selled a ra a-gostez)

Daoust ha petra 'glevan aze, 'mesk ar balan ?

(Kemer a ra ar gordenn evid en em zivenn).

Kevrenn V

Yann, Lenora

(Goloet he fenn gand eur penn-kap).

Yann

Eur plah ! Piou eo houmañ ? 'Michañs eur goz vatez ?

Lenora

Matez, houll koz ? Biskoaz n'on bet. Ya, peizantez !

Yann

Ma Doue... N'eo ket te a welis en koad Lanvao ?

Lenora

Ya, me eo Lenora.

(Dizoloi a ra he fenn).

Yann

Petra 'rez dre ar vro ?

Lenora

Petra 'rez da-unan ?

Yann

Me a glask ma bara !

Lenora

Ha me ivez. – Lar din, Ar Faoued 'zo ama' ?

Yann

Amañ ‘maout er hanton. Berne ‘zo en-kichenn.

Lenora

(lirzin)

Berne !... Amañ, paotr koz, ‘ma o chom markiz Gêr,
‘Zo brudet en peb leh ‘vel eur gwall vrezeler.

Kevrenn VI

An heveleb re : Pontkalleg, Kouedig, Peizanted

Pontkalleg

Lenora !

(Koueza ‘ra war benn e hlin, e zaouarn juntet).

Lenora

Ma mignon !...

Pontkalleg

(en eur zevel, a lavar d’ar beizanted) :

It da Verne buan

Da gonta on viktor ha doare an emgann.

(Da Yann)

Ha te ivez, paotr koz, kerz founnuz ahalenn.

Hag eur wech all, diwall eun tamm gwelloh da benn.

(Teuler a ra eur yalhad arhant dezañ).

Yann

(Dezañ e-unan).

Me ‘chomo da zelaou amañ, ‘dreg eur wezenn.

Kevrenn VII

Lenora, Pontkalleg, Kouedig

Lenora

Da bromesaou ‘oa faoz ! Eet out diganin-me,

O ! ma brasa mignon !... Ha me a zeu dit-te !...

Rag me da gar kalz re ‘vid beva anez dit !..

Lez ahanon hepken eun eurvez en da gichenn,

Goude, goude hepken, ‘halli kemer ma fenn

Ma rei da zerjanted da gas deuz ar vro-ma’

Ma lakaad da vatez, da sklavez, ma laza...

Deuz Lanvao d’ar Faoued on deut, me ma-unan,

Kignet ma zreidigou gand ar vein hag al lann,

En eur glask ma bara, ‘n eur glask an aluzenn,

Deuz poaniou na trubuil forz ebed ne reen !

Me ‘gav din, Pontkalleg, ‘mije treuzet ar bed

‘Vid galloud c’hoaz eur wech komz on-daou a-gevred.

(Tenerroh)

‘Peus ket a zoñj, mignon, pa oam ‘mesk ar bojou

Deuz pegement a draou kontchem ‘barz ar hoajou...

An neñv hag an douar hag an traou hag an dud
Dirag on harantez ken pur a chome mud
‘Vel pa ‘dije bet c’hoant ivez da unani
Levenez o halon gand joaiou on hini.
(*Pontkalleg a lak e zorn war e dal*).
Pontkalleg ! Pontkalleg ! Piou en-deus da droet ,
Piou eo an den digar ‘n-eus on dispartiet ?

(*Er heit-se Kouedig, hag a valee war an teatr, a chom en e zao*).

Me ‘zo paour hag izel, te ‘zo braz da ligne
Mez ma halon a losk gand tan da garante’,
Me da gar ! Me ‘garje diskouez dit ma halon.

Pontkalleg

(*en eur gemer he daouarn*)
Ma mestrez paour !... Siwaz !... O ! ro din da bardon.
Te ‘zo koant ! Te ‘zo mad ! Ha me ‘zo eun dra fall...
Pa’ m-beus da zilezel ez on bet teir gwech dall !
Ya ! Ma Lenora gêz, me ‘m-eus soñj euz an de’
E kaozejom du-ze an eil gand egile,
Hag e prometeten dit...

Kouedig

(*en e bart e-unan*)
O ! Pebez sorserez
Kollet ‘vo Pontkalleg gand ijin an diaoulez !
(*Uhel ha difonn*).
Pontkalleg, permet din rei eur huzul mad ;
Ma kerez, ar wech-mañ digor da zaoulagad.
Me lar dit krak-ha-krenn, mar rez ar zotoni-ze
E pellao diouzit ha da vroiz ha me.
Mar rez ar zotoni-ze, piou a zalvo Arvor ?
On fiziañs ‘zo ennout !’ Gollez ket da enor.

Pontkalleg

(*pleget e benn*)
O ! ma zalver Jezuz ! Me ho ped d’am zikour.
Mar ne virit ouzin, ez in da heul an dour...
Santez Barba, lar din petra ‘zlean d’ober
Ha me lako eul lamp arhant war da aoter.

Lenora

Ma mestr, ma mignon paour, te’zelaou an dud all
Ha ma mouez evidout a zo mouez eur plah fall !
O ! ma hallfen diskouez ma ene dit a-bez !
(*Kregi a ra da ouela*)

Pontkalleg

(*he hemer etre e zivreh*)
Lenora, Lenora ! Poan a ra din gweled
An daerou o hlebia da chodou dislivet !
Paour-kêz merhig vihan... Me ivez da garan !
Me ‘garje, me ‘garje... boud ar houër disterrañ
Ha lezel gand eun all ma hurunenn markiz

‘Vid galloud beza dit...

(En eur drei ‘trezeg Kouedig).

O ! Kouedig, me ‘zo skuiz !

(Goloi ra e fas gand e zaouarn).

Lenora

Ha perag ivez ‘ta n’on ganet priñsez ?

Ken kaled e vo din mond kuit da jamez !

Pontkalleg

Lenora !

Kouedig

(garo)

Pontkalleg, ar merhed ‘zoug maleur

‘Tre da Vro ha houmañ, dibab eo deut an eur.

Pontkalleg

(sonn e benn)

Dibab !...

(Soñjal a ra).

Greet eo an taol !... An dro-mañ c’hoaz ouspenn

Ma harantez ‘vid Breiz a dreho war ma fenn.

(Da Lenora) :

Lenora, fin a zo. Red eo ankounac’haad.

Kenavo.

(Pellaad a ra).

Ha Doue, on mestr, d’az miro mad.

(Mond a ra kuit buan gand Kouedig).

Kevrenn VIII

Lenora

(mantret).

Ma Doue benniget !)

(Gouela a ra).

Eun huñvre eo hemañ.

(Selled a ra tro-war-dro).

Ma Zalver ! Ma Jezuz ! Peleh on deut amañ !

Ma halon ‘zo goret, ma alan a zo berr,

‘H an da vervel, allaz, a-barz nebeud amzer.

Klevet ‘peus anezañ ? Ar muntreer ken digar !

Chaseet ez on bet hep keuz hag heb glahar.

Penaoz e rin bremañ, ma-unan war ar bed ?

-Distaol d’ar gêr, kemer adarre hent Gwened ?

Ya, ankouaom pep tra.-

(Goude soñjal, e kri gand fulor) :

O ! nann ! Me ‘n em veñjo !

Re douillet eo ma hreiz gand eun drenenn haro.

(Nebet).

Peleh mond ? Peleh troi ? Penaoz ober bremañ ?

(Goude eur pennadig)

Dond a ra din eur zoñj. Unan mad an dro-mañ.

Me ‘zo mestrez warne. Me ‘anvez o doare.

Me ‘m-eus klevet aneze ‘trougomz euz ar roue,

Euz ar rejant, euz Frañs, euz an intandanted,

Pontkalleg, ha Kouedig, ha Montlouis, ha Talhoued...
Me en em veñjo sur ! Da Roazon me yelo
'Vid gweled ar gouarnour. Dezañ me lavaro
Kement tra o-deus greet, kement tra a reont !
Goude 'hallfom dond oll d'am laza... ma kredont !
(*Mond a ra kuit*).

Kevrenn IX

Yann ar Gall

(*a zispah deuz e guziadenn*).
Hañ ? Hañ ? Ma flahig paour ! Te a rey jabadao ?
Te a yel' da Roazon da ober da blah vrao ?
Da draisa an dud ? Mez daonet ne vin ket
War da lerh me welo penaoz e vo ar bed...
(Ar ridoch a zsikenn).

Arvest III

(*An teatr a ziskouezo eur zal euz kastell Berne ; Pontkalleg
a vije aliez o chom eno. An dra-mañ a dremenno er bloavez
1719*).

Kevrenn I

Pontkalleg, Kouedig

Pontkalleg

(*azezet ouz eun daol, a lenn paperou. Kouedig a vale dre ar
zal*).
Ar heleier 'zeu deom deuz Pariz a zo du !
Montesquiou 'n-eus barnet Rochefort d'an harlu,
Lambilli a zo bet kaset er-mêz ar vro,
Ha daou rujumant all 'tegaser war on zro.
'Vid gwir, Parlamant Breiz a zo droug-braz ennañ
Deuz Fulup Orleañs ; mez an dizurz brasañ
'Zo dre-oll. An taillou a vez falldastumet
Hag ar Stadou o-un 'zo enno trubarded ?
Fall-fall e yey ar bed mar n'on-deus ket sikour.
...-Mez deuz lein an tour meur, ne wel sort ar gedour-
Prijant, 'michañs, 'zo bet lazeta pe brizoniet,
Ha biken d'on harpa ne zeuio Spagnoled.

Kouedig

Mar ne deu ket Doue ha Sent koz Breiz-Izel
Da harpa ahanom, 'vo reuz na vo ket pell.
Mez, esperom bepred. Petra 'hellont ober ?
Maner Berne 'zo kreñv ! Peb mevel ha pep kouër
'N-eus eur fuzuill bremañ, hag on mignoned vad
'Deus hirio en o zro ouspenn deg mil Breizad.

Pontkalleg

Gwir eo, Kouedig, ha den, na pa ve ar roue,
Ne lako, heb mervel, e dreid war bro Gerne.

Petra 'teu an dud-se da ober en on touez ?
Pell a-walh zo, kredabl, om lakaet da dud ouez,
Om mahet ha gwasket, sunet deom on arhant,
Krouget ar Vretoned, en plasou kant-ha-kant
Perag on-beus kollet gwad ar Geltiaded koz ?
N'eus ken a dujantil en on mesk, ma malloz !
Emaint oll en Pariz, pe c'hoaz en Versailles,
Oh ober allazig d'ar Rejant ha d'e Lez.
Dilezet eo ganto ar gwiskamañchou koz,
Kalz aneze, war ma feiz 'dleje lakaad eur vroz !
Kalz a dud a reñk vraz n'ouzont 'med galleg.
Allaz, 'benn daou-hant vloaz, piou gomzo brezoneg¹⁵ ?

Kouedig

Ba ! Ba ! Ar brezoneg 'bado keit hag ar mor !
'Benn daou-hant vloaz 'vo c'hoaz komzet dre an Arvor.

Pontkalleg

Evuruz int, Kouedig, ar re o-deus ar feiz,
Med daoust petra laran, me ivez 'gred en Breiz,
Me 'gred ne gouezo ket. Nann, n'eo ket posubl se,
... Da vihanna, Kouedig, keid m'am-bo eur hleze !

Mouez ar Gedour

(er-mêz)
Eun den a zo erru amañ gand an hini braz,
Eur zah a zo war e gein hag en e zorn, eur vaz,
Daoubleget ha krommet ez eo e izili.

Pontkalleg

Prijant eo !

Kouedig

Gortozom.

(Selled a ra)

Ya ! Eñ eo, me bari !

Kevrenn II

Pontkalleg , Kouedig, Prijant

*(Prijant, skuiz ha poultrennet, a zeu e-barz. Pontkalleg
ha Kouedig a bok dezañ)*

Pontkalleg

Erru 'oas, Prijant kêz !

Prijant

Erru 'oan, aotroune' !

(En eur hoarzin)

Biskoaz 'mije kredet 'oa ken hir an hent-se,
Spagn, n'eus ket a vorhed, 'zo er penn all d'ar bed.
(Dizamma a ra e zah).

¹⁵ 'benn daou-hant vloaz, piou gomzo brezoneg : maro eo ar brezoneg evel yez ar gevredigez tro-dro da 1950.

Pontkalleg

Sehed ho-peus ha naon ?

(Hopal a ra e toull an nor)

Prientit jistr ha boued.

(Da B/Prijant)

Azez war eur gador ha displeg deom da dro.

Prijant

Ma zro, aotrounez kêz, 'zo leun avanturiou ;
Ra vo meulet Doue hag ivez Sant Kadou
Ma faeron, rag 'nez deze e oan bremañ beuzet,
Lakaet en eur prizon, mahagnet pe lazet,
P'erruis en Gwened e kavis er porz-mor
Eur vag pintet en gwenn, 'oa eno war heh eor,
Steredenn 'oa skrivet war an tu 'dreñv dezi,
Hag eur martolod koz 'oa 'n e zao warnezi.
Lambilli, emon-me da vestr ar vagig wenn,
Ha me 'barz, ma lizer gwriet 'barz em chupenn.
An amzer 'oa c'hwek, hag eun êzenn dener
A hweze deuz gwalarn. An neñvou a oa sklêr,
Ha war bont al lestrig, ar martolod ha me
'Gontem deuz ar brezel a vije prest du-ze...
Mez d'ar pemped devez an oabl a goumoulas,
An avel a freas hag ar glao a gouezas,
Ha me, 'vel ne oan bet gwech ebed war ar mor
E peden em halon oll zent koz an Arvor.
Konogan, mestr ar vag, 'chome sioul koulskoude
Hag a sturie al lestr 'kreiz luhed an arne.
'Benn ar seizved devez e oam en Santander
Eun tammig kêr lirzin, war ribl ar mor seder.
Penaos ober neuze ? N'anavezen hent ebed !
Dre chañs 'kavis eno eur marhadour loened
A yee evel don da Vadrid. Asamblez
E rejom ar veaj, rag ar marhadour kêz
Oue eun tamm latin, ha me eun tammig all.
(A-wechou ez eo mad gouzoud langaj Tud-Hall)
Greet ganeom ugent leo (an noz a oa erru)
E weljom dirazom eur hoad ledan ha du.
Me 'oa ali da chom war ar plas da gousked,
Gortoz an deiz war-lerh... Mez eñ n'asante ket.
A-boan ma oam er hoad, e klevjom eur youhadenn,
Hag e oa warnom daouzeg pe drizeg den
Fuzuillou 'n o daouarn, sabrinier ouz o glin ;
War ma feiz ! Gand ar spont e kouezjom d'an daoulin,
Taoliou treid, taoliou dorn a resevis a-vern.
Me 'zoñje 'oan maro pe gouezet en ivern.
Da veure, pa gredis sevel ma fenn d'an neh
Ma mignon a oa trohet dioutañ e zivreh
Ha toullet e vruched gand laonenn eur hleze ;
War an douar, e yalh houlo a hourveze.
Me ne oan ket lazet... mez bloñset 'oan dre-oll
Ha ma zammig arhant, siwaz, a oa war goll.
Eur harr a dremene, am hemeras e-kuit
Ha daou zeiz goude-ze, 'welen touriou Madrid.
Klask a ris ar palez Escorial anvet

Evid rei d'ar roue ma hevriddi guzet.
Goude gortoz eun tamm, e kavis degemer.
Pa lennas ar roue hed-ha hed al lizer
E dal a zeuas du hag e zellou teñval :
« Dañjeruz eo, 'mezañ, klask afer ouz Bro-Hall. »
... Euz a-dreg eur ridoch, eun den a zispakas
E zaoulagad 'oa lemm 'vel daoulagad eur haz,
Gantañ 'oa eur zae du brodet gand seizennou.
Ouz e vruched e oa az¹⁶ ibil chadennou.
Ouz ar roue 'sellas, hag ouzin goude-ze,
Mez heb faouta eur ger. Hag ar roue neuze
A houlennas : « Cellamar, petra eo da ali !
Pemp mil den a houlenn diganin Lambilli. »
Cellamar 'respontas : « Me 'dou krenn hag uhel
Pemp mil den n'int ket re da zikour Breiz-Izel. »
« 'Vel ma larez aze, Cellamar, e vo greet,
A-raog eur miz amañ, listri 'vo harnezet
Ha pemp mil den a yey da zikour Breiz-Izel.
Doue da lakaad ganeom chañs ar brezel. »
Ar roue 'roas din eur yalh, ha me, seder,
A brenas eur marh mad da zond da Z/Santander.
Eno edo chomet Konogan d'am gortoz,
Ha setu, aotrounez, me distro, ha dispoz.

Pontkalleg

Meulet ra vo Doue en-deus da skoazellet
Hag on lakaet da gaoud sikour ar Spagnoled.
'Benn bremañ al listri a zo eet war ar mor,
Emaint war an hent mad da zond beteg Arvor.
Pemp mil den warnezo, ha deg mil prest amañ !
Rejant ha Dragoned, ni ho kortoz bremañ !

Mouez ar Gedour

Eun den a zo amañ hag a houlenn digor !

Pontkalleg

Gedour, hastit buan digeri din an nor.

Kevrenn III

An heveleb re ; Yann ar Gall

Pontkalleg

Sell 'ta ! Te adarre ! War ma feiz, te, ma den,
A zo bet n'eus ket pell tost-mad d'ar grougadenn.

Yann ar Gall

Ho tigarez, ma mestr. Deoh-hu ha da hemañ
(*diskouez a ra Kouedig*)
Eo ma tlean hirio war ar bed-mañ
Mez, mar ma aotreit, me gonto deoh traou all.
'Baoe an avañtur-ze eo bet pell Yann ar Gall !

Pontkalleg

¹⁶ az : ? Marteze "eiz"

Peleh out bet 'ta, Yann ?

Yann ar Gall

En Roazon ez on bet

Hag eno, aotrounez, traou nevez 'm-eus desket.

(krenn)

'Peus ket soñj deuz ar plah 'zo anvet Lenora ?

Pontkalleg

(ken krenn all)

Petra 'hoarvez ganit ?

Yann ar Gall

(heb ober van)

Ar vleizez ar grisa

'Vije bet treh dezi ! Komprenit, aotrounez !

Lenora a zo bet en Roazon a-nevez,

Ha disklêriet he-deus da Houarnour or Bro

Hoh emzao, hag an traou a brierter tro-dro...

Me am-beus he heuliet evel eur hi feal

Traiset oh ganti d'an dud deut a Vro-Hall...

Kouedig

Mil malloz ! Hag eo gwir ?

Yann ar Gall

Ken gwir ma'z on amañ¹⁷

Prest d'ho tivenn, beteg ma klemmvan diwezañ !

Prijant

Ar hagn ! Perag eta n'hallan ket hi...

Pontkalleg

Ro peuh.

Kouedig

Daoust hag hi 'deus laret in anoïou, ar veuh¹⁸ !

Yann ar Gall

Ya.

Pontkalleg

Neuze, mignoned, n'eus 'med eun dra d'ober

Brezellekaad dioustu, heb gortoz on faker.

Kouedig

Bodom emberr da noz on zud en Koad Berne,

Ha gwaz d'ar re 'zeuio dirag beg on hleze.

Mouez ar Gedour

Daou zen a zo amañ hag a houenn digor...

Pontkalleg

Gedour, mar dint tud vad, digorit deze an nor.

¹⁷ ma'z on amañ : m'emaon amañ.

¹⁸ ar veuh : ar vuoh.

Kevrenn IV

An heveleb re, Talhoued, Montlouis

Talhoued ha **Montlouis**

Demad, tud an ti-mañ.

Pontkalleg

(a stard o daouarn)

Doue da vo ganeoh,

Talhoued, ha te Montlouis. Pe vrezel 'zo, pe beoh ?

Talhoued

Ar brezel a zo deut. Ar vro a zo savet.

Pemp pe hweh rujumant warnom 'zo stlapet,

Hag eur helou tristoh a degasom, siwaz,

Listri Spagn a zo eet da oueled ar mor braz.

Bez' ez int kollet oll, ya, oll, nemed unan,

A zo deut da Wened da gas ar helou-mañ.

Pontkalleg

(trist)

Dorn Doue 'zo pounner evid ar Vretoned !

Montlouis

Red eo stourm.

Pontkalleg

Red e vo. Galvom ar beizanted.

Mouez ar Gedour

Ar vro 'zo goloet gand paotred a bep stad,

Fuzuillou 'zo ganto, filhier hag armou mad,

An êr o-deus da zond d'ho klask amañ.

Pontkalleg

Ar re-ze 'zo kouërien, on mignoned wellañ.

(Kleved a reer youhadennou)

Pontkalleg

Talhoued, Montlouis, Ar Gall, ha te ivez, Prijant,

Deom gand ar beizanted 'trezeg an Oriant

Da gemer ar gêr-ze, 'zo eun toull Gallaoued.

Eur wech tapet hounnez 'vefom mestr war Wened.

(Kleved a reer kana " Bro goz ma zadou " er-mêz)

Pontkalleg

Selaouit ! Hounnez eo galvadenn ar Breton !

Heuillit ahanon oll, 'neb 'zo gwaz a galon.

(Sailla 'reont er-mêz).

(Ar ridoch a ziskenn)

Arrvest IV

(An teatr a dleo diskouez leurger eur vourh vihan).

Kevrenn I

Pontkalleg

(E-unan, eul lian en-dro dezañ).

O Doue, peleh on¹⁹ ! Ha piou am resevo ?
Devet eo ma hastell gand dragoned haro.
Eur vagad soudarded warnom a zo kouezet
Hag e-pad eun devez, tujentil, peizanted
On-beus stourmet gand nerz... Mez soudarded Vro-Hall
'Deuz lazet eur bern tud, gouliet ar re all,
Ha bremañ e redom dre beb leh, heb eun ti...
Prijant a zo lazet ! Ha Talhoued ha Montlouis
A zo bet prizoniet !... Kouedig yaouank, ma breur,
N'ouzon doare ebed anezañ ! O gwalleur !
Paour-kêz Breiz ! Da vibien a zo 'vel loened ouez
O redeg ar mêziou... Trubarded 'zo 'n o zouez !
An arme galoneg am-boa bet dastumet
A zo bet kollet deh, rannet, dispartiet ;
Ar reuz, ar reveulzi a holo on bro vad
Ar Gall en-deus lakaet eun hual d'ar Breizad !
Peleh ema bremañ on mignoned gwella ?...
Dilezet om ganto d'ar mare diweza...
Lenora, Lenora, pebez taol e-peus greet
O werza d'an estren gouenn-dud ar Vretoned...
Me, peb dor 'zo serret dre leh ma tremenan
Hg an dragoned kriz a vo prestig amañ...

Kevrenn II

Pontkalleg, Kouedig

Kouedig

Pontkalleg... ma mignon...

Pontkalleg

Kouedig... Me a grede

E oas chomet e-mesk ar re varo, du-ze.

Doue da vo meulet pa'z out ivez salvet.

Kouedig

Kemeret 'm-eus an teh dirag an dragoned,

Ha krapet 'dreg eur hleuz on chomet pell amzer.

N'o-deus gwelet netra. Mez bremañ on hlasker.

Pontkalleg

Gloazet out, ma mignon !

Kouedig

Ma breh a zo kignet.

An dra-ze n'eo netra. Mez te 'zo gouliet ?

¹⁹ peleh on ? : peleh emañ ?

Pontkalleg

Eun dragon 'n-eus trohet ma zal gand e gleze ;
Mez penn eur Breton mad ne faout ket evel-se.

Kouedig

Klaskom eun ti bennag. Deom da houlenñ amañ.

(Skei a reont war an nor).

Kevrenn III

An heveleb re. Eur Person koz

Ar Person

Piou 'zo aze ?

Pontkalleg

Daou zen ! Daou varheg euz a Vreiz
Pontkalleg ha Kouedig.

Ar Person

(a zeu er-mêz euz e di)

Ma Zalver ha ma Feiz !

Pontkalleg ha Kouedig !... Ya, me hoh anvez mad.
N'eus ket war zouar Breiz daou zen ken hegarad.
Penaoz oh-hu amañ ?²⁰

Pontkalleg

Penaoz, aotrou Person ?

War on lerh 'zo laosket ouspenn pemp-kant dragon !
Peizanted ar Faoued a zo bet distrujet,
Kannety om bet hirio en koajou Trevered.
Gwerzet gand trubarded, harluet euz on bro,
N'on-beus ken 'med eun dra da hortoz : ar maro.

Ar Person

Ma mignoned karet, na gomzit ket 'vel-se,
Mestr da vuhez an den n'eus hini 'med Doue,
Ha Doue, mar 'n-eus c'hoant, a zeuio d'ho sikour
Ha da ziskar an dud a zo deom enebour²¹.

Kouedig

Doue, aotrou Person, en-deus on dilezet...
Ha gwaska 'ra e zorn war gouenn ar Vretoned.

Ar Person

Eun deiz pe zeiz, paotred, Doue 'nevo e dro !
Gwaz neuze da gement 'zeuy da hegas on bro !
Me ivez, eveldoh, a garan Breiz-Izel,
Ha mar n'hallan ket mond ma-unan d'ar brezel
E pedan beb mintin, e-pad ma overenn,

²⁰ Penaoz oh-hu amañ ! : penaoz emao-hu amañ ?

²¹ enebour : enebourien.

‘Vid ma vo tennet Breiz deuz daouarn an estren.
... Bremañ, ma mignoned, c’hwi ‘chomo ‘barz ma zi ;
(D’ho klask beteg amañ me gred ne deuy hini).
Ha goude, pa vo eet e-kuit ar zoudarded,
C’hwi ‘halvo adarre gouenn-dud ar Vretoned.

Kevrenn IV

An heveleb re. Yann ar Gall

Yann ar Gall

(skuiz o redeg, hag eur forh gantañ).

Aotrounez !... Soudarded a zo erru en kêr...

‘Maint a-hont... o furchal ar hambchou... an tier,

‘Maint o klask ar Vreiziz...

Pontkalleg

(sioul)

Lez anezo da zond

Mar ‘n em gavont amañ ni ‘roio deze o hont.

Kevrenn V

An heveleb re. Dragoned

An Dragoned

(a gan en eur erruoud, war eun ton nevez).

Ni eo an dragoned,

Taga ‘reom ar Vretoned,

Ni eo an dragoned !

Pontkalleg, Kouedig, Yann ar Gall

(war ar memez ton)

Ni eo ar Vretoned,

Tud divergont, krenet, krenet²² !

Ni eo ar Vretoned !

Pontkalleg

(a zihouin, hag a gan)²³

Me ‘zo Breton a ouenn divlamm

Hag a-raogoh, aon n’am-eus tamm.

Koueidg ; Kouedig, ma mignon mad,

Diskouezom galloud ar Breizad !

Kabiten an Dragoned

(a gan)²⁴

Ni ‘beus greet an dro d’an douar

²² krenet (= krenit): krenet er skrid orin. Stumm Kerne-Uhel, lezet lezet amañ evid ar rim.

²³ Pontkalleg : war don “Seiz Gwengamp“ (notenn gand Taldir)

²⁴ (a gan) :War don : “Le Régiment de Sambre et Meuse“ (notenn gand Taldir)

Ha nebleh ne gavjom on far !
Pa zihouinom on hlezeier
E teh raktal peb brezeler !

An Dragoned

Ni eo an dragoned,
Taga 'reom ar Vretoned,
Ni eo an dragoned !

Kouedig

(a gan)
Taga 'hanom ne rafot ket
Kaer ho-peus beza dragoned !
Koz dragoned ! Forz a ran-me
Demeuz mevelien ar roue !

Ar Vretoned

Ni eo ar Vretoned,
Tud divergont, krenit, krenet !
Ni eo ar Vretoned !

Kabiten an Dragoned

Tud diboell, pennou divergont,
Bremaig e varvfot gand ar spont !
Pa vefot chadennet ganeom
'Trezeg kêr Naoned ho kasfom.

Pontkalleg

Kasit ahanom da Naoned,
Da Bariz ivez, mar keret²⁵,
Mez 'benn ma vin eet deuz an ti
Glahar en-do meur a hini.

Kouedig

Ar gwad er plas-mañ a ruillo !
Pontkalleg, marvom 'vid on bro,
Gwell eo mervel 'barz an emgann
'Vid beva dindan an tirann²⁶.

(Ar hlezeier 'zo dihouinet : prest e ver da gregi).

Ar person

(a gomz neuze).
Ma bugale garet, m'ho ped, na skoit ket.
Na skuillit ket ar gwad, eur beleg eo ho ped,
Pardonit d'ar bourreo, 'vel ma reas Jezuz
Pa varvas war ar groaz 'vid eur bed gwalleüruz.

Pontkalleg

(pa glev ano Jezuz, a daol e gleze hag a lavar d'an dragoned) :
Chadennit din ma horv ! Chadennit anezañ !...

Kouedig

²⁵ mar keret : mar karit.

²⁶ an tirann : galleg, evid ar rim.

Ma a rey evel dout, ma mignon ar gwellañ.
(*Chadenna a reer anezo*).

Yann ar Gall

(*a daol e forh*)

Pebez forh vad !... Setu ma daouarn deoh ivez !
Ne zilezin biken ahanoh, aotrounez.
(*Chadenna a reer Yann*).

Ar person

Ha me ?... Dragoned kriz, bourrevien ar vro-mañ,
Ma hemerit ivez !

Kabiten an Dragoned

(*en eur hoarzin goap*).

Ne refom ket bremañ
Re goz out, ha re dreud. Kerz du-ze d'an iliz
Da zibun pedennou hed da hed an ofis.

An Dragoned

(*a gan en eur gas ar Vretoned ganto*).

Ni eo an dragoned,
Taga 'reom ar Vretoned,
Ni eo an dragoned !
(*Mond a reont kuit*).

Kevrenn VI

Ar Person

(*e-unan, a ouel*).

Ma Doue !... Gall bounner eo ho torn war on bro,
Kouedig a laer gwir !... Spontusa da varo
E vo roet gante d'ar Vretoned ken mad !
'Vid o bro hag o feiz e tivero o gwad !...
Da Naoned ! Kas aneze da Naoned ! 'Vid Petra ?
Piou a zo en Naoned a hallfe o barna ?
N'eus 'med eul Lez en Breiz lakaet da ober se
Ha Parlamant Roazon, me 'gred, eo al Lez-se !
O ! displealded kriz ! An nerz eo a zo an treh.
Pegoulz e savo c'hoaz ar Vretoned o breh ?...
... Miret am-eus oute da zivenn o buhez...
Mez – Petra 'oant o-zri 'eneb da dud ken gouez ?
... Marteze e teufont adarre war o hiz !...
O ! Jezuz, Maria ! Teurvezit ma hleved
Gand ma vezint du-ze
(*Diskouez a ra ar baradoz*).

da vihanna salvet !...

(*Ar person a ya en e di*).

(*Ar ridoch a ziskenn*).

Pemped arvest

(An teatr a ziskouezo diabarz eur prizon en Naoned, ar 25 a viz Meurz 1720).

Kevrenn I

Ar Jolier, Lenora

(Gwisket en paotr yaouank).

Ar Jolier

Ahanta ! Te 'peus c'hoant neuze da gaoud ma flas
E-pad eun deiz hepken ? Tra-walh e ve da gas
Ahanon d'ar maro.

Lenora

Ma friz just. Daou-hant skoed.
Ne rin ket eun diner ouspenn, diner ebed !

Ar Jolier

Daou-hant skoed... Hag ar riskl ? Chaset e vin krenn
Mar ven tapet gand-se. Ha marteze ma fenn
'Vo distaget ivez diwar ma diskoaz paour !

Lenora

N'out ket den a rezon ! Sell pegement a aour
A ra 'ta daou-hant skoed ! Soñj en da vugale
A ri sur o eurvad er bed, gand an aour-ze.
(Diskouez a ra eur yalhad).

Ar Jolier

Te 'zo eun toueller, paotr yaouank, a gredan.
Red e vo din senti ouzit, war ma welan.
Ingal eo ! Hep risklou ne honezer netra !
Al ! Greet ar marhad. Ro da arhant ama'.

Lenora

Ha ro din da zillad, da alhweziou ive'.
(Gwiska 'ra dillad ar jolier).
Lez ahanon bermañ, ha kerz du guz du-ze.

Kevrenn II

Lenora

(Heh-unan)

Hirio 'ta e welin adarre Pontkalleg !
Paour-kêz markiz yaouank ! Pebez den kaloneg !
Ha dre ma faot din-me ez eo bet digoret
Ha degaset amañ da vervel en Naoned !
O pebez plah digar ez on bet en deiz-se,
P'am-beus gwerzet ma bro da vañjañs ar re-ze !
Mar n'am-ije ket c'hoaz gwerzet nemed ma bro...
Mez roet 'm-eus ouspenn ma hoantuz²⁷ d'ar maro.
Spontusa tra eo se ! Red e vo din eta
Êsaad o zavetei buan deuz an toull-ma'.

²⁷ ma hoantuz :an hini a garen.

(eur vouez en diavêz)

Jolier, kousket out 'ta ? Digor din ar perzier
Ma taolin 'barz da doull aze, pemp prizonier.

*(Lenora a zigor an nor, hag e teu er prizon Pontkalleg,
Kouedig, Talhoued, Montlouis hag Ar Gall, chadennet. Ar
soudard 'n-eus degaset anezo a ya e-kuit dioustu).*

Kevrenn III

Lenora *(er foñs)*, **Pontkalleg, Kouedig, Talhoued,
Montlouis, Yann ar Gall.**

Pontkalleg

Ar wech-mañ, mignoned, ez om paket da vad.
Birviken alemañ ne dehfe eur Breizad.
Sellit an doriou teo hag ar muriou uhel
'Zo lakaet etrezom hag on bro Breiz-Izel !!

Talhoued

Tapet om sur er pech evel pemp logodenn.
Doue hepken 'hallfe on tenna ahalenn.

Lenora

*(a zeu en eun taol krenn war-du a-raog an teatr, e-keñver
gand Pontkalleg, hag a lavar).*
Doue... ha Lenora !!
(Tenna a ra he zok braz hag he chupenn).

Pontkalleg

Malloz ! Petar 'welan ?
Ha te bepred ! Dirag ma fas out deut amañ ?
Lez ahanom etart da vervel gand sioulder
Heb dond da ober fent war da bemp prizonier.

Kouedig

Peseurt êl fall houmañ !

Pontkalleg

O ! planedenn haro !
Gweled c'hoaz an hini 'zo abeg d'on maro.

Lenora

(dous).
Pontkalleg, ha Kouedig, ha c'hwi, kement ez oh,
Lenora 'hall bremañ kalz a draou evidoh.
Ma 'm-eus ho traiset, ya, me 'm-eus ho kwerzet,

Birviken gand Doue ne vezin pardonet...
Daoust da ze, keuz am-eus deuz ma zorfed skrijuz,
Deut on da zaovetei pemp Breizad gwalleüruz.

Pontkalleg

Kerz e-kuit, Satanas ! Da gomzou a zo fall
Ha da galon a zo du 'vel da oberiou all.
Eun êl 'zo war da zremm, eun diaoul en da galon,
Biken, nann, birviken, ne roin dit pardon !

Kouedig

Ha ma na bardonfem²⁸ ket da dorfed dit hirio
Birviken n'az-pefe pardon digand on bro.
Gwall blah ! Dre da deod fall 'peus gwerzet Brezi-Izel.
Gwerzet da vamm, da dud, ha douar da gavell !
Teh kuit ! Lez ahanom da vervel en peoh.

Lenora

Pardon a houlenann !

Talhued, Montlouis

Biken ! Mervel kentoh !

Lenora

Ma Doue ! Tud digar !
(*Trei a ra adarre 'trezeg Pontkalleg*)
Pontkalleg, pardon din !

Pontkalleg

N'out ket dign a bardon.

Lenora

Neuze, mervel a rin !!

Koulskoude... Me 'zo deut evid ho silvidigez !
Galloud a ran digeri peb dor gand ma alhwez ;
Ha goude, pa vefoh eet deuz ar prizon du
E hallfoh adarre prezegi a bep tu.
N'eus netra kollet c'hoaz, kemerit 'ta fiziañs,
Hastit, hastit buan, rag tost eo ar setañs !

Yann ar Gall

Ya, deom oll ahalenn !

Pontkalleg

Kouedig, petra ober ?

(*Trouz er-mêz*).

Eur vouez

Digorit an nor-mañ d'ar Varnerien,jolier !

Lenora

(*mantret*)
Jezuz ! Ar Vranerien ! Kollet int ar wech-mañ.
(*Digeri a ra an nor*).

Pontkalleg

An dro ma emaom tost d'an termen diwezañ.

Kevrenn IV

²⁸ Ha ma na bardonfem : er skrid orin ; ha na pa bardonfem

An heveleb re. Daou Varner. Eur Soudard

Ar Barner Braz

(Eur paper en e zorn)

C’hwi, kement oh amañ²⁹, prientit hoh ene
Da vervel mad warhoaz, war-dro ar goulou de’.

(Gervel a ra)

Pontkalleg !

Pontkalleg

Aze ‘mañ.

Ar Barner

(Krenn)

C’hwi ‘stourm ouz ar Rejant,

Ha greet ho-peus brezel d’ar gwir gouarnamant.

Bet ho-peus galvet Spagn. – Gand lezvarn an Naoned

C’hwi ‘zo bet barnet da veza dibennet.

Pontkalleg

Piou amañ, en Naoned, a hall barn eur markiz !

Breujou ‘zo en Roazon, me ‘gred, hervez ar hiz.

Ar Barner

An urz-mañ a zo greet gand Fulup Orléans,

Pehini³⁰ ‘zalh bremañ plas Loeiz, roue ar Frañs.

(Gervel a ra).

Kouedig !

Kouedig

Aze emañ.

Ar Barner

‘Vid ar memez sujed

Oh bet barnet ivez da veza dibennet.

Kouedig

Dislealded eo se. N’eus ket bet a brosez

Ha kondaonet ez om ‘vel chas gand eul lakez.

Ar Barner

Talhued !

Talhued

A zo amañ.

Ar Barner

‘Vid ar memez sujed

Oh barnet ivez da veza dibennet ;

Montlouis !

Montlouis

A zo amañ.

²⁹ oh amañ : emañ amañ.

³⁰ Pehini : fazi boaz en amzer-ze : an hini.

Ar Barner

Prientit hoh ene.

Da vervel mad warhoaz, war-dro ar goulou-de'.
Yann Ar Gall !

Yann Ar Gall

Amañ 'mañ, koz penton didalet !

Ar Barner

Yann Ar Gall a zo barnet da veza bahatet
War dachenn vraz ar gêr. Kant taol a oa merket,
Kant all bremañ ouspenn, 'vid geriou direspët.

Yann Ar Gall

Trohit ouzin ma goug, evel d'ar re-mañ all.
Ne ran forz diouzoh, na deuz Rejant Bro-Hall.
(*Ar soudard a gemer Yann hag a stlej anezañ er-mêz*)

Lenora

(*a zeu neuze dirag ar varnerien*).
Barnerien digalon ! N'on 'med eur plah, 'vid gwir,
Mez me ouio d'am zro eva li ar halir.
Me am-eus traiset ar brizonerien-mañ
Ha d'o zalva on deut ivez beteg amañ !
Deut on 'barz ar prizon, touellet ar jolier
Ha kemeret e leh 'vid ober e vicher
Ha tenna diganeoh, tud fall ha displeal,
Tu vad ha n'o-deus greet nemed kasaad Bro-Hall.

Ar Barner

(*kounnaret*)
Kiez ! Te n'out ket dign da veza dibennet,
Bremaig, 'vel egile, te a vo bahatet.

(*Lenora a ro eur skouarnad d'ar barner*).

Ar Barner

O ! tra spontuz ! Eur plah dond da skei eur barner !...
Krouget e vi warhoaz uhel 'barz an êr !...
(*Ar varnerien a ya e-kuit*).

Kevrenn V

An heveleb re nemed Yann hag ar varnerien.

Lenora

(*a gouez d'an daoulin dirag Pontkalleg*)
Ahanta, Pontkalleg, dign on diouzit bremañ ?

Pontkalleg

(*a zao anezi*)
Deus 'ta war ma halon, plah yaouank a garan.
Braz eh eo bet da faot, ha da geuz ken braz all.
Da varo a walho da dorfed displeal !

Hag unanet on-daou en eur bed divarvel
Ni a vo eürusoh evid en Breiz-Izel.

Lenora

N'eo ket a-walh din c'hoaz kavoud pardon unan,
Ho pardon deoh-hu oll bremañ a houlennan.
Bravoh 'vo din mervel, dineh ma halonig,
Mar varvan pardonet... ha karet eun tammig.

Kouedig, Talhoued, Montlouis

Pardonet out, plah paour, pardonet out ganeom !
Warhoaz da houlou-deiz asamblez e varvfom...

Pontkalleg

Diskenn a ra an noz beteg deun ar prizon,
An noz ivez 'ziskenn dre damm war on halon.
N'on-beus mui, mignoned, 'med eun nozvez buhez,
Warhoaz ar vourrevien a rey o micher ouez.
Kemerom nerz-kalon, evel pemp gwir Vreizad !
Doue, er baradoz, a rey deom plasou mad.
... Ha bremañ, 'vid galloud gortoz an eur haro
E kanfom, mar kerit, *Kanaouenn ar Maro*.

Kanaouenn ar Maro

(War eun ton klemmuz)

Pontkalleg

Heñvel ouz lapoused paket gand ar sparfell
A-boan ma oant deuet d'êsaad o diouaskell
Evel-se, mignoned, emaom mañ hirio
Hag 'uz d'on fenn ema o nijal an Anko'.

Kouedig

An dour a zo kollet buan 'barz ar mor braz,
Ar vagig ne lez merk nemed eur roudenn hlaz
Ni ivez 'dremeno gwalleüruz war ar bed
Ha n'on-bo ket zoken eur bez 'barz eur vered.

Talhoued

Yaouank ha kaloneg, dispont 'barz ar brezel,
Ni 'oa lakaet d'ober vad d'on bro Breiz-Izel.
Mez tud kriz ha digar, hag on enebourien
O-deus bet greet, siwaz, lezenn d'ar varnerien.

Montlouis

Ar maro a zo kaer pa varver en argad,
Mez beza dibennet ! O ! pebez kalonad !
Dougen chadennou hir heb galloud 'n em zével,
Gwasa da blanedenn 'vid tud a Vreiz-Izel.

Lenora

Me a zo Bretonez, ganet en Bro-Wened
Ha kabluz ez on bet dirag ar Vretoned,
Mez p'am-eus bet pardon, gand joa me a varvo,
Ne varv den re abred, pa varv evid e vro !

Pontkalleg

Lenora, te 'mar gwir ! Ni 'varvo heb glahar.
Petra 'hall ober deom barnerien an douar ?
N'eus 'med eur barner mad. Warhoaz ni hen gwelo
Du-ze 'uz d'ar prizon, e-barz Breiz an neñvo'.

Oll asamblez

Pedi 'refom Doue, deuz lein ar baradoz,
'Vid ar Vretoned paour a zo c'hoaz o hortoz,
O hortoz an amzer dous ha seven-meurbed
Ma vo rentet Justis d'or bro muia-garet.

(Ridoch)